

# Kantik Sant Izidor

PATRON AL LABOURERIEN DOUAR

Var don : *Kelven*, pe : *Breuriez ar Feiz*.

DISKAN :

*Sant Izidor benniget, pātron al labourer,  
Ra vo meulet hoc'h hano dre holl, e peb amzer ;  
Al labourerien douar a c'houlen ho pennoz,  
Ma vint ganeoc'h sikouret da vont d'ar baradoz.*

1.

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gær vraz, (1)  
Hag eno a-vihanik 'vel eur zant e vevas.  
Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel  
Aketuz da zoursial euz ene ho bugel.

2.

P'e deut en oad Izidor da c'honit he vara,  
Da di eun den pinvidik e ia da zervicha ;  
He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz douarou,  
Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.

3.

Euruz ar penn-tiegez, pa c'hell fiziout peb tra  
En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.  
Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen  
Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.

---

(1) E Madrid, kær gapital bro Spagn.

4.

Bep mintin, sant Izidor oa fidel d'he beden ;  
Bemde zoken oa kustum da vont d'an offeren ;  
He holl zevosionou vije achu abred,  
Hag euz labour he zevez ne rëant gaou ebet.

5.

Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer,  
Guall deodou hen tamallas divarbenn koll amzer ;  
He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas  
Gant Doue, d'hen didrompla, ober eur burzud braz.

6.

Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,  
A ia var he zouarou da ober eur bale.  
Guelet 'ra he zervicher 'kreiz eur park oc'h arat,  
Gant daou El guenn 'n he gichen, daou El o labourat !

7.

Liez a vech, dorn Doue a rëas burzudou,  
Evit lakât da bara muioc'h he vertuziou ;  
Eur vech, gant beg he c'harzon, 'n eur skei var an douar,  
Ar Zant 'lakas da zavel eun eienen dispar.

8.

Meur a vech all, d'he vignon Doue 'rentas henor :  
Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;  
Ar Zant a oa he galon ken mad euz ar beorien  
Ma kave gras ho guelet, ha rei d'è aluzen.

9.

Ni labourerien douar, evel hor patron ker,  
Hervez bolonte Doue, implijomp hon amzer ;  
Pedi, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez,  
Eo merk ar vue gristen, guir hent ar zantelez.

---

**Imprimatur :**

*Quimper, ce 27 Août 1904.*

F. CORRIGOU, *Vic. gén.*

---

Kemper, J. SALAUN, leorier.